


## Keleier Plogoff

1. Diouzh ar mintin pa zav ar glizh  
E sav an ed hag ar gwinizh  
E sav an ed diouzh an douar  
Na pa vez c'hoazh an heol klouar
2. Ouzhpenn an heol a zav abred  
Ouzhpenn ar gwinizh hag an ed  
Keleier fall dre ar c'hontre  
A zav abretoc'h 'vit an de'
3. Ha tud Plogoff a lavare  
E traoñ an tour an eil d'egile  
Livirit din e gwirionez  
Petra zo nevez er barrez
4. Petra zo nevez e Plogoff  
Har ar parrezioù tro-war-dro  
Na pa welan war ar blasenn  
Jañ-Mari Kerloc'h teñval e benn
5. Ar pezh a glevan a zo spontus  
Ouzhpenn m'eo trist ha glac'harus  
Gwerzhet eo Plogoff da Baris  
Ur sañtral vras 'plas ar gwinizh
6. 'Plas an ed ur mekanik foll  
A vije gouest da lac'han an holl  
Peotramant c'hoazh a-nebeudoù  
D'hor c'has er-maez eus hon  
douaroù
7. 'Vit hor c'has 'maez ne raio ket  
Warlec'h an had e teuio an ed  
Hag an ed 'ranker da zormañ  
Araok ma chomje da vreinañ



**Storlok** a zo bet ur strollad sonerezh eus Breizh hag a gane da gentañ penn kanaouennoù doare rock, hag ivez blues, e brezhoneg. Blaz ar folk a oa ivez gant o fladenn vras. Ne badas ket pell ar strollad-se. Daoust da se e tapas ur vrud “mitik” pa oa bet degaset un doare nevez da ganañ brezhoneg ganto ha pozioù stag eus darvoudoù o amzer.

Darn eus o c'hanaouennoù a zo anavezet mat c'hoazh evel *Gwerz ar vezhinaerien*, *Keleier Plogoff* pe *Boutoù koat dre dan*. Etre keleier ar stourmoù er vro (*Keleier Plogo* ha *Kastell Rock*) hag ar stourmoù etrebroadel (*Gwerz Marv Jorj Jackson*), un nebeut sonerien ha kanerien yaouank o deus divizet er bloavezh 1976 « lavar' ar bed e brezhoneg » o heuliañ froud sonerezh ar mare. Ar strollad ne bado ket muioc'h evit pevar bloaz met roudoù hag heklek a chom c'hoazh war e lerc'h.

Da ganañ ha skrivañ pozioù ar strollad e oa : Denez Abernot, Bernez Tangi, Mona Jaouen, Bob Simon...

8. Hag amañ e parrez Plogoff  
An aotrou bras hag e gof teo  
Pa deuio gant e roched gwenn  
A zesko bale er vouilhenn
9. Bez e tesko gant e ardoù  
Piv eo ar mestr war an douaroù  
Na pa ranko mont war e giz  
Don er vouilhenn betek Paris
10. Ha bremañ p'eo echu va son  
M'ho peus ket soñj vat deus an  
ton  
Kanit anezhi war un ton all  
Ha kanit, kanit, 'vel gwechall